

ADRIEN DE CARNÉ

BARZ AN ARVOR



Kristen ha Breizad da virviken



AR MABIK JEZUZ

Myster enn eun arvest



BREST

4 — MOULLEREZ RU AR C'HASTEL — 4

1910

Diocèse de
Quimper & Léon
Evêché de Quimper & Léon

Document numérisé en 2016

ARGUMENT


Cette œuvre comporte l'Annonciation, la veille de nuit des bergers de Bethleem, l'apparition de l'étoile miraculeuse, la venue de l'ange annonçant la naissance du Christ, l'adoration des anges, des bergers et des rois.

Elle contient cinq cantiques : *Le Poème de la Reine des Cieux*, chanté par les anges après l'Annonciation, *la Prière nocturne des bergers*, *le Gloria des Anges*, *le Cantique à l'Enfant Jésus*, et *l'Hymne à la Crèche*, traduction de *l'Adeste* en breton, sur l'air que chante l'Eglise.

La belle œuvre de M. l'abbé Jouin, *la Nativité*, a fourni à ce mystère quelques idées, notamment celle du baiser donné par l'Enfant Jésus au plus petit des bergers et à la Très Sainte Vierge.

Plusieurs dialogues sont traduits littéralement de l'Evangile ; quelques épisodes reproduisent de simples traditions, reconnues, d'ailleurs, comme étant des plus vénérables. La musique des cinq petits poèmes intercalés dans le mystère est empruntée aux recueils de cantiques universellement répandus et approuvés tant en France qu'en Bretagne.

Divin enfant Jésus, daignez maintenir dans votre grâce eucharistique et recevoir, dans la vie éternelle, avec les bretons fidèles qui vous adorent, celui qui a écrit cette œuvre toute remplie de votre amour.



TUD AR MYSTER :

AR MABIK JEZUZ.

AR WERC'HEZ VARI.

SANT JOZEF, 30 pe 35 vloaz.

SANT GABRIEL, arc'heal.

MATHIAS, 5 pe 6 vloaz.

MERARI, 8 vloaz.

ARAM, 10 —

ZARA, 14 —

ELIFAL, 20 —

AMMIEL, 30 —

ELIEZER, 70 — bleo ha

baro gwenn d'ez-han.

MELKIOR.

GASPAR

BALTHAZAR, morian.

C'houec'h eal.

Tud euz a Vethleem.

Ofiserien oc'h heulia an tri roue.

Paotred an denved.

Rouaned.

Ar myster-ma a dremen, da genta, e Nazareth,
e ti ar Werc'hez Vari, hag eun nebeut goude, er
meaz, tost da Vethleem, hear Juda. Gweled an
teatr a zo enn-han brankou gwez, o kuzat kraou ar
C'hinivelez. E penn diveza ar myster, ne vo ken da
ober nemet lemel lod euz ar brankou-ze, evit m'en
em ziskouezo ar C'hraou santel.

KENTA LODEN

KENTA DIVIZ

AR WERC'HEZ VARI. *N'euz nemet hi azezet a gleiz,
o neza eur gegiliad lin.*

Echu eo va labour ganen evit an deiz ma. Setu
an heol o vont da guzat. Setu an noz o tont en dro.
Ar steredenn genta a welan o lugerni. Nag hi a zo
kaer ! Va daoulagad a zo euruz da zellet oc'h an
envou. An Aotrou Doue, a garan kement, a zo o
choum eno. Poent eo d'in lavaret va fedennou
dioc'h an noz.

Sevel a ra, hag en em laka war he daoulin, da
bedi, he fenn savet warzu an env, he daouarn
lekeat e kroaz war boull he c'haloun.

Doue gallouduz ! Doue madelezuz ! Ho karoud a
ran gand holl nerz va ene, gand holl nerz va
c'haloun. Krouer an env hag an douar, plijet gan-e-
hoc'h kaout truez ouz kement tra ho peuz great, ha
dreist pep tra ouz ar bec'herien geiz. O Doue ! leun
a c'halloud, sellit ouz ho servicherez. Ra zavo va
fedenn, etrezek enn-hoc'h, evel c'houez vad ar roz
e Jeriko, evel moged c'houek an ezans o tevi war
an aoter koat sethim gwisket gand aour melen !
O Doue ! leun a vadelez, prenit Israel hag hen
dizammit da viken euz e holl bec'hejou !

Ar Werc'hez a laka he fenn enn he daouarn, hag
a gendalc'h he fedenn goustadik. An arc'heal
Gabriel a zeu ebarz, eul lilien wenn enn e zourn
kleiz. Stoui a ra diraz-hi, en eur blega e c'hlin
deou. Ar Werc'hez, ha n'he deuz ket her gwelet da
genta, a zo eun tammik spountet o welet anezhan.

II DIVIZ

AR WERC'HEZ. AN ARC'HEAL GABRIEL

AN ARC'HEAL

Me ho salud, Mari, leun a c'hras ; an Aotrou Doue zo gan-ehoc'h ; benniget oc'h dreist an holl gragez. (1)

AR WERC'HEZ, *spountet eun tamm atao*

A beleac'h e teu d'in me, eun enor ken dispar ?
Ha perak ta ema eal santel an Aotrou Doue o saludi eur Werc'hez paour ?

AN ARC'HEAL

N'ho pezet ket a aoun, Mari ; kavet ho peuz trugarez dirak Doue. C'houi a gonsovo hag e c'hanot eur mab. Rei a reot d'ez-han an hano a Jezuz. Heman a vezo braz, hag hanvet e vezo mab an Huela.

An Aotrou Doue a roio d'ez-han tron David, e dad ; ren a raio e ti Jakob, hag e ren a bado da virviken. (2)

AR WERC'HEZ.

Ha penaoz e c'hoarvezo an dra ze ? Me a zo en em westlet da Zoue evit mad. (2)

AN ARC'HEAL, *o sevel*

Ar Spered Santel a ziskenno enn-hoc'h, ha galloud an Huela a c'holoio ac'hanoc'h euz e skeud. Setu perag an Hini santel a vezo ganet digan-ehoc'h a vezo hanvet Mab Doue.

Elizabeth, ho kiniterv, evit hi da veza koz, he deuz ive konsevet eur mab, hag ar miz ma eo ar c'houec'hved d'ez-hi. Rak n'euz netra dreist galloud an Aotrou Doue. (2)

(1) S. Luc. Ch. I. 28.

(2) S. Luc. Ch. I. 30 à 38.

AR WERC'HEZ

Me zo servicherez an Aotrou. Ra vezo great d'in hervez ho lavar. (1)

An arc'heal a ia kuit, goustadik, war e gil, en eur zellet atao ouz ar Werc'hez. Hou ma a jom war he daoulin, o pedi, epad m'ema an elez o kana er meaz, pell.

KANAOUENN ROUANEZ AN ENVOU

War don : O va ene, kanomp bemdez

Pa vez, epad sklerder an deiz
Bleunvet al lili gwenn kann,
Gwennoc'h eget o dillad seiz
Gwennoc'h oud, o rozenn glan !

Serafined,
Kerubined,
Ha keuriou all a elez,
En em strollomp
Holl, ha kanomp
Kanaouenn ar Rouanez.

War da gurunenn leun a c'hloar
Stered ez euz, Gwerc'hez koant ;
Dindan da dreid, ema al loar,
An heol zo da wiskamant. (2)

Serafined,
Kerubined,
Ha keuriou all a elez,
En em strollomp
Holl, ha kanomp
Kanaouenn ar Rouanez.

Ar goel a ziskenn.

(1) S. Luc. Ch. I. 30 à 38.

(2) S. Jean. Apoc. Ch. XII. 1.

V. aussi Saint Bernard. Sermon de l'octave de l'Assomption ; parg. 3, 6 et 7.

EIL LODEN

KENTA DIVIZ

AMMIEL, *e unan, o c'hervel ar re all gant eur vouez huel.*

Deuit 'ta! hastit affo ta! noz tenval eo anezhi. Tremen a ra buhan an amzer. Deuit da deuler evez ouc'h an denved; deuit, va breudeur. Ho kortoz a ran.

II DIVIZ

AMMIEL, ZARA, ELIFAL, ELIEZER

ELIFAL

Amzer zo, Ammiel, amzer zo. Ne c'heller ket kerzet ker buhan ze epad an noz ma.

AMMIEL

Ha perak ta?

ZARA

Perak? Abalamour d'an dud. Eur maread tud a zo dre aman, eiz dervez zo. An henchou, striz pe ledan, ar parkeier, al liorzou, ar c'hoajou olived, ar c'hoajou oranjez, ar prajou a zo leun a dud, o vont hag o tont hep ehana.

Eliezer a azez, eun tammik pelloc'h, war eur bank.

ELIFAL

Hag an tiez ta, hag an hostalirioù! Kalz tud a zo e pep leac'h.

ZARA

Kear Wethleem a zo leun braz. Me zo eat da Wethleem deac'h. N'em euz gwelet epo nemet divroidi. Kalz marc'hadourien am euz gwelet ive, o dillat marellet a bep seurt liou. Krial a bouez

penn a reant, o kinnig da gement den a dremene o marc'hadourez hag o zraou a ziaveaz bro, laboused, frouez-balmez, frouez koko, fiez, avalou, baraou, kouignou, gwin koz, louzou c'houez vad, bokejou, ha me a oar me? Aoun am euz bet na vijen me deuet da veza bouzar gant-ho.

AMMIEL

Mad. Mar d'oud bet bouzaret eun tamm, n'oud ket deuet da veza mud, tamm ebed, a gav d'in. Na kaer eo da deod!

ZARA

An holl draou am euz gwelet oa kaeroc'h c'hoaz. Mez n'ouzoun ket a beleac'h e teu eun niver ker braz a dud.

ELIEZER

N'ouzot ket an dra ze? Selaou ta, va faotr. Bugale Israel a oa, gweach all goz, bugale Doue. Pellaat a reont bemdez diout-han, pell braz a zo, siouaz! An nep a nac'h e Zoue, n'euz forz piou e ve; ha pa ve zoken pobl a Israel, an hini muia karet gant Doue, ne ra nemet mont mui-oc'h-mui war izellaat. Hon tadou koz oa sklaved dindan galloud ar roue Babilon. *Gant eur vouez krenvoc'h.* Ni zo sklaved an impalaer a Rom, Sézar Aogust.

ZARA

Petra a ra ze d'in? An dra ze ne c'hell ket displega d'in piou a zo o lakaat kemend all a dud da zont da Wethleem.

ELIEZER

Selaou ta, pennglaouik! An impalaer eo a zastum an dud evelse e pep leac'h. Fellet eo bet d'ez-han gouzout pet den a ioa dindan e c'halloud.

AMMIEL

Ne ket eaz niveri anezho. Rouantelez Aogust en em zalc'h war holl vroadou an douar.

ELIFAL

Gwir eo ; rak se an impalaer en deuz embannet ar gourc'hemenn d'e holl zujidi mont da rei o hano war rollou ar renerien, pep hini er gear ma z'eo bet ganet e lignez enn-hi.

ZARA

Klevet a ran.

ELIEZER, *o sevel*

Hag an holl, ken ar re vihan, ken ar re vraz, merched ha goazed, a zo red d'ez-ho plega d'ar gourc'hemenn-ze. Setu perag ez euz kemend a dud e Betleem, kerkoulz hag er c'heriou all. Ha klevet a rez te mad, breman, paotrik ?

ZARA

Ia, Eliezer. Ho trugarekaat a ran da veza displeget kement se d'in.

ELIFAL

Sell ta ! Setu Aram o tont aman.

III DIVIZ

AN HEVELEP RE. ARAM

AMMIEL

Petra eo d'id, va mignounik, beza ken divezad o tont da ziwal da zenved ?

ARAM

Petra eo ? Traou brao kenan. P'edoun o kerzet war an hent, o tont aman, va daoulagad o deuz bet plijadur o sellet warzu an env, ker skeduz evel m'oa stered an Aotrou Doue. Mez traou kaeroc'h c'hoaz am euz gwelet.

ELIFAL

Ha petra ta ?

ARAM

Eur strollad elez, o saeou gwennoc'h eget an erc'h, o nijal huel huel, euz an eil penn an envou d'egile, euz an eil steredenn d'eben.

ZARA

Kousket a rez, a gav d'in, o lavaret d'eomp sorc'hennou evelse.

ARAM, *eun tammik droug enn-han*

Ne gouskan ket, tamm ebed. Sell ouz-in ! Va daoulagad a zo digor frank. Gwelet am euz an elez kerkoulz ha ma welan ac'hanoud. Mez koantoc'h egedoud e oant, avad.

ELIEZER

Peoc'h ta, peoc'h ! Ha petra o deuz great an elez goude ze, va mab ? *Kriadennou er meaz.*

IV DIVIZ

AN HEVELEP RE. MERARI HA MATHIAS

MERARI, *o krial, er meaz*

Aram, Zara ! Peleac'h emaoch hu ? Peleac'h emaoch hu ?

ARAM, *o sellet er meaz*

Tostait aman, tostait ; war ar wenodenn vad emaoch. Deuit aman, deuit.

MERARI, *o tont ebarz, dourn ha dourn gant Mathias*

An hent a zo bet kollet ganeomp da genta, noz evel ma z'eo dindan ar c'hoajou.

AMMIEL

Aram a zo deuet divezad. Mez c'houi ho taou a zeu divezatoc'h c'hoaz eged-han. Evit petra ?

MATHIAS

Chom hor beuz great da zellet ouz an dud o tremen war an hent.

AMMIEL

Da zellet oc'h tud eleac'h dont aman gand ar re all ?

MERARI

Ia, da zellet ouz an dud. Ha gant plijadur vraz e sellempt out-ho. Bez ez oa eur goaz, eun itroun iaouank gant-han. Hema a zo eun den a zoare vad meurbed. Mez an itroun iaouank avad, hounnez n'he deuz ket he far.

ZARA

Ha penaoz ho peuz gwelet anezhi awalc'h, enn noz ma, ken tenval ?

MATHIAS

An den a ioa eur c'houlouenn-rouzin gant-han da rei sklerder war an hent. Oc'h sklerijen ar c'houlouenn ze hor beuz gwelet an itroun, ha ne gredomp ket e ve eur vaouez henvel ouz ar mer-c'hed all.

AMMIEL

Ha piou e ve hounnez, neuze ta ?

MERARI

Ne ouzomp ket. Eur brinzez bennag a gav d'in, pe eur rouanez euz ar re vrasa.

ZARA

Eur gurunenn a oa gant-hi, marteze, war he fenn ?

MATHIAS

Kurunenn ebed. N'he doa war he fenn nemet eur goel hir, o tiskenn kaer war he diskoaz ; mez kredi a ran stard evelato e ve eur rouanez e ve.

ELIFAL eo

Petra eo d'id kredi an dra ze ? Me garfe gouzout.

MERARI

Kaer braz eo an dremm anezhi. Va mamm a zo koant, a dra zur ; va c'hoarezed vraz a zo koantoc'h c'hoaz. An itroun iaouank se a zo bravoc'h eget va mamm geaz, bravoc'h eget va c'hoarezed. Ar gaera anezho holl eo ; ha ne c'hellemp ket distaga hor selladou dioc'h he daoulagad dudiuz.

ZARA

Penaoz ho peuz gellet chom da zellet out-hi keit all a amzer ? An dud se ne reant nemet tremen e biou d'e-hoc'h.

MERARI

N'eo ket. An itroun hag an hini oa gant-hi, o veza skuiz, a rea eun azezik war ribl an hent. Rak se e c'hellemp sellet eaz out-ho.

ELIEZER

Mad. Eleac'h sellet ker piz out-ho, dereatoc'h e vije bet d'e-hoc'h o saludi.

MATHIAS

Hen ober hor beuz great ive.

ELIEZER

Ha penaoz ta ?

MERARI

Evel-hen. *Merari ha Mathias en em laka, o daou, war o daoulin, tost a dost, o dremm warzu an dud. Pep hini a laka e zaouarn kroazet, evel pa vefe o pidi.*

ELIEZER

Mad eo. Savit enn ho sa, mignounedigou. Ha neuze, petra o deuz lavaret ar re-ze d'e-hoc'h ?

MERARI

Ger ebed. Mez an itroun gaer he deuz sellet ouzomp gand eur mousc'hoarz laouen evel an heol o sevel. Goude-ze, an daou zo eat kuit.

AMMIEL

Hag oc'h deuet aman dioc'htu ? *Klevet a reer pellik, trouz an dud o krial a unan. Ammiel a zell oc'h ar meaz. Sellit ta ! sellit. Eur vandenn denved eo o vont kuit er meaz euz ar prad. It buhan ta, Zara, Elifal, Aram. It buhan da viret out-ho da vont kuit. Laoskit ar chas dioc'htu da c'haloupat war o lerc'h.*

Zara, Elifal hag Aram a ia kuit. Klevet a reer ar chas oc'h harzal pell.

V DIVIZ

AN HEVELEP RE, *nemet Aram, Elifal ha Zara*

ELIEZER

Mad a reont. Eur mesaer mad eo red d'ezhan klask e zenved kollet, ken n'en devezo kavet anezho. Selaou ta, Ammiell. Petra eo, war da vennoz, holl lavariou ze ar vugale ? Unan a well an elez. Ar re all en em gav war an hent, gant tud divroad, hag en em daol war o daoulin dirazho evel dirak kannaded an Aotrou Doue. Petra sonjez te, Ammiel, euz an holl draou a welomp ?

AMMIEL

Ar re vihan ze n'o deuz ket lavaret ar wirionez, marteze,

ELIEZER

Her lavaret o deuz, Ammiell. Ar vugaleigou, pa

vez eur burzud bennag oc'h en em ziskouez dezho, ne lavaront ket gevier. Lavaret a reont, e leal, ar pez o deuz gwelet. Darvoudou a bouez braz a c'hoarvezo, war an douar ne vezo ket pell, a gav d'in. Ar bed a zo fall braz e lezennou ; an impalaerien o deuz savet ar falz doueou a enep gwir Doue hon tadou. Hon Doue ni a zavo, d'e dro, a enep d'ezho.

Trouz er meaz, great gant Zara, Elifal, Aram ha mesaerien all.

ZARA

Sellit ta ! Sellit oc'h an envou ta ! Na skeduz eo anezhi ! Na kaer eo ! Sellit ta ! Deuit da zellet.

ELIEZER, *o komz huel*

Ha petra ta a c'hoarvez adarre ?

VI DIVIZ

AN HEVELEP RE. ZARA, ELIFAL, ARAM, *o tont ebarz o redek, o zri*

ZARA, *levenez enn-han*

Deuit buhan, Eliezer, Ammiel, deuit holl a dre ar gwez huel ze. Digorit frank ho taoulagad ha sellit oc'h ar steredenn gaer meurbed se.

An holl a ia a unan pelloc'h, hag a zav o daoulagad etrezek an env.

AMMIEL

Gwir eo, avad. N'em euz gwelet biskoaz eun all o para ker sklear.

ELIFAL

Na lemm eo he sklerijenn ta ?

ZARA

Lugerni a ra, gwenn-melen, liou arc'hant ha liou aour enn-hi evel pa ve eun heol bihan e ve.

ELIEZER

Petra a fell d'ezhan, an Aotrou Doue ?

Ema o skuilla e c'hras warnomp, me a gred,
gand ar steredenn zispar ze. Ar werelaouenn, hag
a zav da c'houlou deiz, evithi da veza steredenn
brava an oabl, ne ket ker kaer eget houn-hont.
Eur burzud nevez eo. Ammiel ha me, n'euz ket
pell, a gomze euz a gement tra souezuz a c'hoarvez
bemdez ganeomp. R'en devezo Doue truez ouzomp.
Ra zigaso, enn hon touez, ar roue braz a gomz
anezhan ar brofeted, ar roue gallouduz a denno
da viken Israel euz e boaniou, en eur zevel a nevez
e rouantelez. Pedomp a unan an Aotrou Doue.

AMMIEL

Ia, Eliezer ; pedomp hervez ho koulenn. A hend
all, ma ne fazian ket, an den a zo o teurel evez
war an tour braz, a zo o vont da zeni, gand ar
c'horn, ar pedennou dioc'h an noz. Selaouit ! *An
holl a zelaou. Klevet a reer, pell-pell, son ar c'horn,
hag eur vouez o krial :*

Poent eo, va breudeur, poent eo lavaret ar
pedennou noz !

ELIEZER

Lavaromp ar bedenn, a unan, a greiz hor c'ha-
loun.

An holl a gan a unan.

PEDENN AR VESAERIEN

War don gallék : Retne des cieux, jette les yeux.

O Doue hon Tad,

A galoun vad

Ni zo sentuz bepred ouz da c'halloud

E kreiz an noz,

Ro da vennoz

D'an holl dud o kana dirazoud

D'an holl dud o kana dirazoud.

Ro hep dale

D'az pugale

Azezet e skeud tenval ar maro, (1)

Ar roue santel,

Mab Israel

Hag a vezo Salver ar vamm-vro

llag a vezo Salver ar vamm-vro.

ELIEZER

Ha breman, avad, en em lekeomp da ziwall mad
hon derved. Ar re vihan, pa zavo c'hoant kousket
gantho, a c'hello en em zastum er pallennou hor
beuz digaset ganeomp.

MERARI

C'hoant kousket braz am euz, me.

MATHIAS

Ha me ive, avad.

ELIEZER

Mad. Deuit ho taou neuze, ma c'hallin lakaat
pallennou enn dro d'e-hoc'h.

*Eliezer a taka ar pallennou war an daou vogel,
hag a astenn anezho war an douar da gousket.*

MERARI, o chom atao dindan ar ballenn, mez oc'h
en em lakaat enn e goazez, hag o sellet piz
warzu ar meaz.

Ammiel ! Ammiel ! an itroun gaer a welan, an den
mad gant-hi, o tont aman.

AMMIEL, o sellet

Peleac'h ta ? Ne welan ket.

MERARI

Sellit ! o kerzet war an hent striz a zo e traon ar
grec'hen emaint, duhont.

(1) S. Luc. Ch. I. 79.

AMMIEL, *o sellet*

Ia, gwelet a ran breman; mez en em likit da gousket p'eo gwir ez oc'h skuiz, Mathias ha te. Allo! kouskit buhan ho taou. *An daou vogel a gousk.*

ELIEZER, *o sellet*

Feiz! an daou vogel a lavare gwir. An dud se a zo dreist ar re all, war a weler.

ELIFAL

Doare an dud a lignez vraz a zo gant-ho.

ELIEZER

Setu hi tostik aman. Deomp kuit pelloc'h da welet petra e c'hoarvezo gant-ho.

An holl a ia kuit, o lezel an daou vogel o kousket, Jozef a zeu ebarz, ar Werc'hez gant-han enn tu deou, hep gwelet an daou vihan.

VII DIVIZ

AN HEVELEP RE. AR WERC'HEZ VARI, SANT JOZEF

JOZEF

Deomp dre aman da welet hag e vezo great deomp ni digemer laouenoc'h eget an hini hor beuz bet eur pennad zo. Nemet evidoc'h n'em euz anken, Mari. C'houi zo skuiz maro, am euz aoun.

MARI

E vefen skuiz pe ne vefen ket, kement se ne ra netra. Ne fell d'in nemet bolontez Doue, ha netra ken.

JOZEF, *o vont a zeou, da gomz oc'h unan bennag, ha ne weler ket anez-han*

Aotrou an hostiz, mar plij, goulenn a ran

digan e-hoc'h ma ve ho madelez lezel ac'hanomp da loja enn ho ti, enn noz ma.

EUR VOUEZ

Kalz a dud a zo em zi, ha kalz re zoken. N'ez euz leac'h ebed aman.

MARI

Bennoz Doue d'ezhan. N'en deuz ket kaset kuit ac'hanomp gant fallentez.

JOZEF, *o vont pelloc'hik, a zeou*

Ezomm braz hor beuz, Aotrou, euz eul leac'hik bennak da dremen an noz, va greg iaouank ha me. Houman a zo skuiz braz, ha diez eun tamm.

EUR VOUEZ RUST

Arc'hant ho peuz?

JOZEF

Tamm ebed, allaz! Rak se ho truez eo e c'hou-lennomp.

AR VOUEZ, *rust atao*

Va zruez? Petra eo an dra ze? N'em euz na lojeiz na gweleou, nemet evit ar re o deuz peadra enn ho c'hodell. Ar re all a c'hell kousket er meaz, gand ar chas. Ne garan ket kalz ar beorien divroad, ar glaskerien bara, ar c'halouperien noz.

JOZEF

Me ho ped, a greiz kaloun, enn han' Doue. Na livirit ket drouk komzou d'eomp. Evidomp da veza paour, ni zo bugale Juda. Hon tadou koz oa tud vraz. Ar roue David a oe unan anez-ho.

AR VOUEZ, *o c'hoarzin iud*

Ha, ha, ha, ha! C'houi zo mipien vihan David ha Juda, ha n'euz ket eun diner toull gan-ehoc'h? N'em euz ket a amzer da goll evelse. It pelloc'h gand hoc'h hent.

JOZEF

Petra sonjit diwar-benn kement se, Mari ? Chom a rit hep lavaret ger.

MARI

Pedi Doue a ran, enn-oun va unan, evit an hini a gas ac'hanomp kuit er meaz.

JOZEF, *o welet an daou vogel kousket,
hag o tostaat out-ho*

Sellit ta, Mari, an daou vogel ze o kousket er meaz. Bugale ar vesaerien eo, hep mar ebed.

MARI, *o tostaat*

An daou vihan, eo a zo en em gavet ganeomp, enn noz ma, war an hent. *O sellet piz outho.* Kaera bugale ! Kousket mad a reont. An hini bihanoc'h a zo koant evel eun ealik. Ra gouezo warn-han, da viken, bennosiou an Aotrou Doue !

VIII DIVIZ

JOZEF, MARI, ELIEZER, AMMIEL, ELIFAL,
AN DAOU VUGEL, kousket atao

ELIFAL

Petra glaskit hu aman, va zud vad ?

JOZEF

Digemer fall hor beuz bet, n'euz nemet eur pen-nadik, digant tud a jom tost aman. O klask eur gambrik bennag emañ, ha ne c'hellan ket he gaout.

AMMIEL

Ha ne gavot ket, avad. Tiez Bethleem a zo leun leun, tiez diwar ar meaz ive, hag hon ti ni n'ema ket tost aman. Anez hon divije roet digor d'e-hoc'h, enn hon ti, ha digor frank.

MARI

Ho trugarekaat stard a reomp. C'houi zo tud a galoun.

JOZEF

Bennoz Doue d'e-hoc'h. Deomp pelloc'h, Mari. Deomp eur weach c'hoaz, da Vethleem, enn tu all d'ar gear.

Jozef ha Mari a ia kuit.

DIVIZ IX

ELIEZER, AMMIEL, ELIFAL

ELIEZER

Poent eo, va mignoured, me a gred, ober an dro-noz, hervez ar c'hiz, a gleiz hag a zeou, da welet hag ez a mad an traou, e pep leac'h, diwar benn an dud, kerkoulz ha diwar-benn al loened.

AMMIEL

Mad, Eliezer ; enn tu deou ez in.

ELIFAL

Ha me enn tu kleiz.

ELIEZER

It kuit, ha ra vezo Doue gan-ehoc'h.

Ammiel hag Elifal a ia kuit.

X DIVIZ

ELIEZER, *e unan, o trei e zaoulagad warzu an env*

Doue ar Batriarched, Doue ar Brofeted ! Me, ho pugel paour ha dister, am euz an hardizegez da zevel va daoulagad leun a zaelou warzu an env m'emaoc'h enn han ! C'houi eo an Doue a zo a vis-koaz hag a vezo da virviken. C'houi eo an Doue hag

ho peuz eur vadelez ha n'he deuz ket he far ! Roit ar furnez d'ar re goz evel doun. *O sellet oc'h an daou vogel kousket.* Ar re iaouank evel an daou vogel a zo kousket dindan va zreid, roit d'ezho nerz al leon, evit an holl draou mad m'ema ar vro garet o c'hedal digantho. Klevet ho peuz, eur pennad zo, ar vesaerien geiz, va breudeur, o kana ho meuleudiou dindan ho stered lugernuz. Klevet ho peuz ar re ze o pidi ac'hanoc'h, enn eur vouez, a greiz kaloun, evit silvidigez an holl. O Doue mad ! ar bedenn ze eo e kinnigan d'ehoc'h adarre. E ma ho ti santel o vont da goueza. Ema ho pobl o vont da netra. Digasit d'eomp an Hini a zavo tron David a nevez. Digasit d'eomp an hini m'emaomp o c'hortoz anezhan, an hini a vezo Roue brudet Israel.

Chom a ra, eun tamm, o pidi enn-han e unan.
Eur sklerijenn vurzuduz a zav a zeou. Ar vesaerien all a zeu ebarz.

XI DIVIZ

ELIEZER, AMMIEL, ELIFAL, ZARA, ARAM

AMMIEL, *souezet braz*

Ne welez ket, Eliezer, ne welez ket eur sklerder kaer o para, gwennoc'h eget hini an heol ?

ELIEZER

Eo, eo, her gwelet mad a ran. Lavaret am euz n'euz ket pell, e c'hoarvesfe meur a dra souezuz ganeomp, hep dale. E kement se n'eo ket fazia am euz great.

ELIFAL

Sellit ouz ar sklerijenn lemm ze. Lugerni a ra mui oc'h mui.

ZARA, *spountet*

Sellit oc'h eun dra all ive, ta. Piou zo aze o kerzet enn tu ma e kreiz ar sklerder ?

ELIEZER

Unan bennag eo o tont aberz an Aotrou Doue a gav d'in. *An holl a grog aoun enn-ho. An daou vogel a zihun hag a zav enn ho sa.*

XII DIVIZ

AN HEVELEP RE. AN ARC'HEAL GABRIEL

AN ARC'HEAL

N'ho pezet ket a aoun ; rak digas a ran d'e-hoc'h eur c'helou hag a vezo eul levenez vraz evid an holl bobl. Ganet eo hirio d'e-hoc'h, e kear David, eur Zalver hag a zo ar C'hrist hag an Aotrou.

Ha setu penaoz e c'hellot hen anavezout.

Kaout a reot eur bugelik nevez ganet, mailluret ha lekeat enn eur c'hraou. (1)

XIII DIVIZ

AN HEVELEP RE. AR C'HOUEC'H EAL, o tont ebarz (2)

KANAOUENN AN ELEZ

War don : Pa voue ganet Jezuz...

AN ELEZ, a unan

O tilezel an env alaouret,
War an douar ni a zo diskennet.
Hor spered a drid gant levenez
En eur gana gouel Ginivelez.

Gloria in excelsis Deo ! (2 w.)

(1) S. Luc. Ch. II. 10 à 12.

(2) S. Luc. Ch. II. 13.

Bethleem, etouez keriou Juda,
Daoust ma z'oud, avad, ar vihana (1).
Gwelet e peuz great, kearik santel
Ar Salver Jezuz enn e gavel.

Gloria in excelsis Deo ! (2 w.)

AN ARC'HEAL

Ha breman, mesaerien euruz, it da Vethleem,
m'ema enn-hi ar Mabik Jezuz oc'h ho kedal enn e
graou.

*An holl a ia kuit, o tremen e biou d'an elez. Epad
m'ema Mathias o tremen, an arc'heal Gabriel a vir
out-han, goustadik, da vont kuit.*

XIV DIVIZ

AN ARC'HEAL, AR C'HOUEC'H EAL, MATHIAS

AN ARC'HEAL, *da Vathias*

Chom aze, eun tamm, va breurik. Chom aze. Me
a oar mad me, da hano. Mez her goulenn a ran,
koulskoude, digan-ez. Lavar da hano d'in te da
unan.

MATHIAS

Me a vez great Mathias ac'hanoun.

AN ARC'HEAL

Mad. Ha karoud a rez mad an Aotrou Doue ?

MATHIAS

Eur garantez vraz am euz out-han.

AN ARC'HEAL

Hag evidoud da veza ken iaouank, her pidi
stard a rez aliez ?

(1) Michée. Ch. V. 2.

MATHIAS

Bemdez, a greiz va c'haloun.

AN ARC'HEAL, *d'ar c'houec'h eal*

Sellit gand evez ouz ar paotrik se. *Ar c'houec'h
eal a zell out-han, en eur vousc'hoarzin. An
arc'heal a lavar neuze da Vathias :*

Kea buan breman da gaout ar re all, gant aoun
na zeufe d'id fizia war an hent. Kea, va kezik :
Doue r'az miro !

Mathias a ia kuit.

XV DIVIZ

AN ARC'HEAL, AR C'HOUEC'H EAL

AN ARC'HEAL

Va selaouit, elez euruz ar baradoz. Guelet ho
peuz ar c'hrouadur bihan-ze. Ober a raio
Doue traou braz anezhan. O veza dirak tron
Doue atao (1) goulouet ouñ oc'h sklerijen an
Aotrou hag anaout a ran kalz traou kuzet. N'eo
ket arabad d'in lakaat ac'hanoc'h da ziski an traou
ze. An Hini nevez ganet hirio, an Aotrou ar Christ,
mab Doue, a vezo gant-han daouzek den o labou-
rat da zavetei ar bed. Peger spountuz, pegen heu-
zuz eo ar pezh en em ziskouez d'in. Eun den a we-
lan, etouez ar re en devezo great Jezuz eun dibab
anezho, eun den a welan hag a werzo e Mignoun,
e vestr, e Zoue ar C'hrist. Ma c'hellfe an elez
gwela, daelou a enkrez a zeufe em daoulagad. Sel-
lomp oc'h traou dudioc'h. Ar bugelik keaz ho
peuz gwelet, eur pennad zo, hag a reer Mathias
anezhan, hennez a vezo lekeat e leac'h an treitour,
e leac'h mab ar gollidigez. (2) Ar bugelik kaer ze,
enn amzer da zont, a zeuio da veza sant Mathias,

(1) S. Luc. Ch. I. 19.

(2) S. Jean Ch. XVIII. 12.

daouzekved abostol an Aotrou ar C'hrist muia karet. (1) Ra vezo benniget, da virviken, an hini bihan ze !

Ha breman, va breudeurigou, deomp d'ar c'hraou santel, da adori Jezuz, mab da Zoue beo.

XVI DIVIZ

AN ARC'HEAL, AN ELEZ, AR MABIK JEZUZ
AR VERC'HEZ, SANT JOZEF

Lemel a reer lod euz ar brankou gwez e gweled an teatr. Ar c'hraou, kempennet ar gwella ma c'hellor en em ziskouez. Ar mabig Jezuz a gousk war eun dournad kolo. Ema ar Werc'hez azezet a gleiz. Ema sant Jozef a zeou, enn e za. An elez en em laka enn o c'hichenn, war o daoulin, tri a zeou, tri a gleiz. An arc'heal Gabriel en em laka enn e za, adre ar c'havel.

XVII DIVIZ

AN HEVELEP RE. AR VESAERIEN

Ar vesaerien a zeu holl ebarz. Pep hini a zoug eun dra bennag, da ginnig d'ar mabik Jezuz, paneradoù avalou-oranjez, kistin, kraoun ha traou all. An holl en em zastum a zeou hag a gan, a unan, drant ha laouen o mousesiou en eur zellet gant karantez ouz ar Mabik Jezuz.

KAN AR MABIK JEZUZ

War don gallek : Il est né, le divin enfant...

DISKAN

Ganet eo ar Mabik Jezuz !
Senit, senit, kornou-boud, bombardou !
Ganet eo ar Mabik Jezuz,
Ar bugelik karantezuz.

(1) Actes des Apôtres. Ch. I. 26.

Bézit laouen, bezit euruz !
Tud an douar ma, elez an envou,
Bézit laouen, bezit euruz,
Ha gloar d'e-hoc'h Tad peurbaduz.

Ganet eo...

Setu hor roue holl c'hallouduz,
Ker gedet gwechall gand hon tadou,
Setu hor roue holl c'hallouduz,
Setu hon heolik burzuduz.

Ganet eo...

An ejenn keaz a zo doujuz
Dirak oanik Doue enn e graou,
An ejenn keaz a zo doujuz,
An azen keaz a zo joauz.

Ganet eo...

Pegen e ve plijaduruz
Ober d'ez-han hor c'haranteziou,
Pegen e ve plijaduruz
Ker koant ma z'eo ha ker karuz !

Ganet eo...

Setu kalz traouigou dudiuz
Kraoun kouignou, kistin hag avalou,
Setu kalz traouigou dudiuz
Bleun gwenn, bleun melen ha bleun ruz.

Ganet eo...

Ha dreist pep tra, fur ha sentuz
En em roomp gand hor c'halounou,
En em roomp, fur ha sentuz
Da viken d'ar Mabik Jezuz !

Ganet eo...

An holl vesaerien a ia dirak kavel ar Mabik Jezuz, Eliezer da genta, hag enn e c'houde, Ammiel, Elifal, Zara, Aram, Merari ha Mathias. Pep hini, an eil goude egile, en em daol war e zaoulin, en em strink d'an douar, a laka e ginnig dirak ar c'havel, a zav, hag a zeu enn dro, a zeou. Endra m'emañt o tremen evelse, ar Mabik Jezuz a gousk enn e gavel. Pa en deuz roet Mathias e ginnig bihan, ar Mabik a zihun, hag a astenn e zivreaç'h etrezek enn-han. Mathias a ia tostik tost d'ar c'havel, ha neuze ar Mabik Jezuz a bok d-ez-han. Goude ma z'eo eat kuit Mathias, ar Mabik Jezuz a zell ouz ar Werc'hez o vousec'hoarzin, hag a ro eur pok ive d-ez-hi. Steredenn ar Rouaned en em ziskouez, neuze, a uz ar c'hraou.

XVIII DIVIZ

AN HEVELEP RE. MELKIOR, GASPAR, BALTHAZAR,
OFISERIEÑ AN TRI ROUE

MELKIOR, o tougen eur varrenn aour melen, a
bleg e c'hlin deou dirak ar Mabik Jezuz (1)

Saludi a ran ac'hanoud, bugelik nevez ganet, bugelik kaer meurbed. Daoust d'ar pezh a welan aman, daoust d'ar c'hraou dister m'emaoud enn-han, daoust d'ar bernik kolo hag a zo da wele, eur roue eo a zo aze dirak va daoulagad. Gallouduz eo ar roue ze. Roue ar rouaned eo. Roue ha n'en deuz ket e bar eo. Petra a vo kavet gwelloc'h da veza kinniget d'eur prinzh ker braz, eget aour ar glana ? Petra a vo kavet gwelloc'h da veza lekeat war e benn, eget kurunenn ar rouaned, kurunenn a c'hloar ma weler enn-hi perlez ha mein talvouduz o lugerni ? D'id e kinigann, o bugel muia karet, ar varrenn aour melen ma ; d'id e kinnigan va c'huru-

(1) S. Matthieu. Ch. II, 9 à 12.

nenn ar gaera. Dreist pep tra, en em rei a ran d'id me va unan, va c'horf, va ene, ha va c'haloun.

Lakaat a ra e gurunenn hag e varrenn aour dirak ar Mabik Jezuz, hag a ia eun tamm pelloc'h, a gleiz.

GASPAR, o tougen eun arc'hik leun a ezans, hag o
plega e c'hlin deou dirak ar Mabik Jezuz

Bugel bihan ker karet ganen, Melkior en deuz da zaludet en eur rei d'id an hano a roue. Mez piou eo eur roue hag a vez goulauet e gavel oc'h sklerijenn eur steredenn ? Meur a weach, em bro bell, am euz savet va daoulagad warzu bolz an envou. Meur a weach am euz sellet ouz ar strolladou stered, ouz al loar goant da welet, ouz an heol skeduz oc'h ober e dro. Deuet oun hirio, avad, dirak an hini a c'hourc'hemenn d'ezho mont ha dont. Deuet oun, hirio, renet gand ar steredenn, dirak an hini a zo ar gwir sklerder, dirak gwir heol ar justiz. Mar d'eo roue hennez, ne ket hep ken roue an douar eo ez eo, mez roue ar baradoz ive. Ha piou e c'hellfe beza roue ar baradoz nemet eun Doue ? Rak se, adori a ran ac'hanoud gant eur feiz beo. Rak se me az ped a greiz va c'haloun. Setu eur voestlad ezans. Ne lakaer ket an ezans da zevi, ne lakaer ket e voged da zavel, e doare eur bedenn, nemet dirak eun Doue. Bugel deuet euz an envou, te zo va Doue a viskoaz da viken.

Lakaat a ra ar voestlad ezans dirak ar Mabik Jezuz, hag a ia eun tamm pelloc'h a gleiz.

BALTHAZAR, o tougen eul lestrih mirr, hag o plega
e c'hlin deou, dirak ar Mabik Jezuz

D'am zro eo, va mabig Jezuz, d'am zro eo lavaret d'id ar pezh a laka va ene da dridal gand anaoudegez vad. Evel m'en deuz great Melkior, saludi a ran enn oud ar roue, mez eur roue hag a zo en em c'hreat paour. Evel m'en deuz great Gaspar, adori a ran enn-oud an Doue, mez eun Doue hag a zo en em c'hreat den. Peger braz ! peger souezuz eo an

dra ze : eun Doue deuet da veza den ! Pegen enoruz eo evidomp ni an dra ze : korf an den kemeret gand eun Doue ! An den eo e saludan enn oud, bugel bihan, flour evel eur rozenn dindan da vaillurou gwenn. Gwenn int a dra zur, gwenn evel al lienenn leun a c'hloar, ma vezo lekeat enn-hi, enn amzer da zont, da gorf maro, balzamet gant c'houez-vad ar mirr. Setu e teuan euz ar zao-heol, dirak ar c'horf santel ze, great dioc'h hon heveledigez. O krouadurik-koant ! Koulmik ar baradoz ! Oanik an Aotrou Doue ! Bleunenn ar Werc'hez ! meuli a ran, enori a ran, adori a ran ac'hanoud gand holl garantez va c'haloun.

Lakaat a ra al lestrih mirr dirak ar mabih Jezuz, hag a ia eun tamm pelloc'h a gleiz.

XIX DIVIZ

AN HEVELEP RE. TUD EUZ A WETHLEEM,
o tont ebarz

*An elez, ar rouaned, ar vesaerien hag ar re all,
a gan gant levenez, gwers ar c'hraou, holl a unan.*

GWERS AR C'HRAOU

War don latin : Adeste, fideles.....

Deud aman, tud fidel, ganeomp ni da welet
E Bethleem, ar gearik venniget
Roue an elez, hirio nevez ganet.

Venite, adoremus, venite adoremus,
Venite, adoremus Dominum.

O lezel o denved, setu mesaerien geiz
Galvet gand elez, zo deuet gant gwir feiz.
En em veskit holl, buhan, enn o c'hreiz.

Venite, adoremus, venite adoremus,
Venite, adoremus Dominum.

Sklerder santel an Tad, aman, en em c'holo
E korf eur bugel, ha c'houi her gwelo
Mailluret war e zournadik kolo.

Venite, adoremus, venite adoremus,
Venite, adoremus Dominum.

Pokomp d'ar paour kezik hag a zo gourvezet
Er c'hraou, evidomp. Piou ne garfe ket
An hini ma z'omp gant-han ker karet ?

Venite adoremus, venite, adoremus
Venite, adremus Dominum !

AR GOEL A ZISKENN

